

Ar servijerez (suite).

ag en e goad int badeet.

– Mam krue! mam kris mam miserabl

te a zo kauz ma zom ni privet
(d)a vellet doue er joaüstet.

eb dadichen(2) dor oc'h laza
Deud he ta poënt da perissa

neuze kommansjont ne dispen
e goad a servijas souden

Da rei badijant de vugale
O tena deus a kaptivite.

Ar belek iaouank pa savas
da offerena evit-hi eo e iaz.

pa voa e lavaret e offeren
e harparissas dre ar veren,
Dre ar veren e harparissas
Da c'haout ar belek e absolvas.

C'houi emezi belek iaouank
O heus dilivret pem enne
pemp enne o heus dilivret
a va enne me da c'houerc'hvet
Da vond d an en da fedi Doue
C'houi deuio ive ab(3) tale

Jannton Ar Charlès, 10 fév. 1851.

(2) Ms. : *dabichen* ; lire : *badichen* ?

(3) Ms. : *ab* ; lire : *eb*.